

Gouel al Lennegezh

Kendael aozet gant ABER
d'ar Sul 29 Meurzh 2009, e Kemper

Hôtel Escale Oceania, 10 rue Théodore Le Hars
(etre ar stêr Odet hag ar straed Jean Jaurès. Tuva en hevelep straed,
pe a-hed ar c'hae)

Roll an devezh

Degemer ar berzhiaded (adal 9:00)

Displegadennoù (9:30-12:30)

- *Joelle Kermaal-Furic* : Tudennoù merc'hed gwelet gant merc'hed : Virginia Woolf, “ War du an tour-tan ” (“ To The Lighthouse ”).
- *Mari Elen Maze* : “ Luz ou le temps sauvage ” (“ Aveinte años, Luz ”), gant Elsa Osorio. En Argantina da vare ar goronaled.
- *Ólöf Pétursdóttir* : barzhed eus broioù disheñvel : Tristan, Kormakr ha Diarmuid.

Pred kemeret a-gevret war al lec'h (12:30-14:30)

Endervezh (14:30-16:30)

- *Tangi Legavre* : “ La conjuration des imbéciles ” (“ A Confederacy of Dunces ”), Kennedy Toole.
- *Pierrette Kermaal* : ar vojennouriezh keltiek e oberennoù Roparz Hemon : “ Lazhadenn Unvab Aife ” (in Barzhonegoù, Al Liamm 1967) - eus ar gwengel d'ar varzhoneg.

Etre an displegadennoù e kinnigo Yann-Ber Quirion sorbiennoù-treset.

Amzer a vo evit ar goulennoù hag an daeloù da heul pep displegadenn.

Klozadur (16:30- 16:45) ha kafe

Skodenn dre zen (pred, kafe ha gortozenn e-barzh) : 25 €. Studierion, dic'hweleion : 15 €.

Evit kemer perzh er gendael kasit an teul-enrollañ-mañ klokaet hag ho skodenn da :
ABER, 115 Kergareg, 29870 Landeda, a-raok ar 15 Meurzh 2009

Kemer a rin perzh e Kendael 29 Meurzh 2009 e Kemper.

Anv/Kentanv _____ Pellgomz/Pelleiler _____

Chomlec'h _____ Mal elektronek _____

Amañ-kevret ur chekenn€ (war anv ABER)

Deiziad : _____ Sinadur : _____